

XVI

E Iliz Gwitalmeze, en amzer dremenet,
 Loden euz ho relegou a zo bet henoret.
 Piou en doa o digaset? N'heller gouzout ervad:
 Heb mar Alan Koativí, kardinal ha Breizad.

XVII

Goude an dispac'h eúzuz a lakaz reuz er vro
 Pell amzer int bet kollet, n'oa mui sonj anez-o;
 Mez hirio, dre e'hlas Doue, int adarre kavet
 Ha var eun aoter nevez en hon iliz savet.

XVIII

Choui roe, var an douar, d'ar c'hanvour ar pare
 Ha d'ar galon gouliet an dizoan adarre,
 Bezit sonj ouz hor poaniou euz lein ar baradoz,
 Hor mirit euz ar peched, Sant Visant, deiz ha noz.

XIX

Goude ken bras madelez ho peuz bet evit Breiz,
 N'hon dilezit ket hirio, grit ma vimp stard er feiz,
 Roit d'eomp doujanz Doue hag e varnedigez,
 Ma ne zizonjimp morse en hor silvidigez.

XX

Ha pa deui pred ar maro, Sant Visant, d'ho kwelet
 Ha d'ho meuli ni yelo da lez kaer an Drinded
 Tad, Mab ha Speréd-Santel, tri hag unan hebken,
 El leac'h ma vezimp euruz gant Doue da vilken.

Imprimatur :

Kemper, 21 a vis Genver.

P. MESSAGER,
 Vik. bras.

Evit goueliou bras Translation Relegou

SANT VISANT FERRIER**GUILHALMEZE****23-24 a Viz Eost 1925**KANTIK var ton : *Ar re unanet.*pe : *Patronez douz ar Folgoat.***Diskan**

Sant Visant, kannad Doue hag henor an Iliz,
 C'houi a zo deut da gelen gwechall an Arvoriz,
 Grit eur zell a drugarez ouz hor bro Breiz-Izel,
 Hirio pedit evidomp, roit d'eomp ho skoazel.

I

Ervez ar vruid, pa 'z edo ho mam ouz ho tougen,
 D'eur baourez dall e roit a-grenn ar sklerijen:
 Kenta burzud, a zigor ero ar burzudou
 A ziwano niveruz dre nerz ho pedennou.

II

Eun tad hag eur vam gristen o deuz, yaouankik-flam,
 Desket d'eoc'h karet Doue hag ar Verchez dinam;
 Hag en ho kalon dener, e sklerijen ar feiz,
 Bleunen gaer ar zantelez a gresk a zeiz da zeiz.

III

A-zevri gant al labour, aketuz d'ar beden,
 C'houi a ouezo kastiza ho korf er binijen;
 Dre ar yun hag ar skourjez e vezo reizet mad;
 C'houi a reio aluzen d'ar páour, d'an emzivad.



IV

Neuze, gant grad ho kerent, c'houi c'houlenno digor
E couent Valencia, er Spagn, var ribl ar mor,
El leach m'ho kalvo Doue en deuz ho tibabet
Evit prezeg e lezen, d'an ampoent dilezett.

V

An ifern zo dirollet, Satan zo mestr ar bed,
E pep korn euz an douar direizded ha pec'hed,
Gadelez ha plijadur, n'euz ken e-touez an dud
A zo kouezet ken izel hag aneaveld mud.

VI

Eun deiz, evel eun drompilh, eur vouez a dregerno,
Hag an dud, ouz he c'hlévet, spountet a zihuno:
« Krenit d'ho puez diroll, lenvit d'ho pec'hejou,
Bremalik e teui' an Aotrou da yavn hoc'h oberou.

VII

Dre ar c'hériou, ar mèziou, dizamant d'ar skuizder,
E valeit heb ehan, rag n'ho peuz ken preder
Nemet digas da Zoue an denved dianket.
A gloze var-n-o, siouaz! skillou an drouk-spered.

VIII

Evel merk ho kefridi, c'houi bare dre vurzud
Tud dall ha tud mac'hagnet, tud bouzar ha tud mud,
Ha beteg ar re varo a zav-euz an arched
Da ziskouez ez eo Doue en deuz ho tigaset.

IX

A-ben diou vech hoc'h unan, den zantel, ho kweloc'h
Euz eur c'hlenvet o sevel yac'h pesk, ha c'houi toc'hor,
N'eo ket peurc'hret ho labour, ha Doue ho pare
Evit mont dre an hentchou da prezeg adarre.

X

Ar Spagn hag an Itali, hag hor Bro-C'hall ive,
Bro-Zaoz, bro ar Jermaned ho klevaz, den Doue,
Hag hon Duk Yan ar Pempved en deuz bet an heror,
Leun a zoujans evidoc'h, d'ho kervel d'an Arvor.

XI

Beleien hag Eskibien a ro d'eo'ch digemer
Evel da Gannad Doue, da Brophed ar Barner;
Hag an dud a villerou, o skei var o cherc'hen
A c'houlenno trugarez, a reio' pinijen.

XII

E Kerazez, e Kemperle ni gavo ho roudou,
E Pont 'n Abad, Konk-Kerne e rit prezegennou,
E Kemper, e Lesneven, Kastel ha Montroulez
Ho peuz bleinet hon tadou var hent ar zantelez.

XIII

Ho kaout a reomp, Sant Visant, en Naoned, e Gwened,
Dre Zant Briek ha Treger c'houi a zo tremenet,
Sant Malo, Dol ha Redon ha kalz a geriou all
A oar oc'h deut d'o gwelet ha d'o c'helen gwechall.

XIV

Mez Gwened, ar gèr eûrutz, a zalc'h ho relegou,
Eno 'teuit da verzel goude ho labourou;
Janned, Dukez Breiz-Izel, merch da Roue Bro-C'hall
Eo he deuz ho sebeliet, ar c'hlac'h var he zal.

XV

Eun deiz d'Alphons Börjia (1) c'houi ho poa lavaret
E vije divezatoch var dron Sant Per savet,
Hag er bloaz pevarzek-kant ha pemp hag hanter-kant,
Gant ar Pab Kallixt trede ez oc'h diskleriet sant.

(1) Alphons Borjia, hanvet da Bab, a gerneraz an hano a Gallixt III.